

AR PORTRET VERITABL

DEUS A

VIZERRIO AR LOENET EN MESQ AR BOET BIAN

Ebars ar blavez present, couls 'vel ar blavez da dont

Laquet en rimm gant IANN AR MINOUS, a barous Plemour-Gautier

BILAJEN ZANT-ADRIEN

VOAR EUN TON DOUS.

Ma ve ann den a zonjfe eun he oll vizerrio
 Nep joaüsdet er bed-man, ive nep dezirrio
 Pelloc'h hen na guemerfe da vean evurus :
 Allas ! buguelic Adam, te zo eur malherus.

Ma na vije nemedout, ive da vianan,
 Na zantehean quet ma c'halon quement o languissan,
 Nep a zo dide zujet, ar pezh a gavan cri,
 A renq c'hoaszooffe, evel-d'hout, goalengner a gast.

Zell ar paour quez danvades, cassei guenit d'ar lann,
 Netra mui na gav eno nemert bruk ha troussann,
 Caër he deus bemde blaëjal, den mui na zell outhi :
 Deja, o clasq n'em vagnan, he deus uzet he fri.

En tout ar pors, p'henn arrio, c'houi he goelo prestic
 O troust he ziscouarn d'ar gomz dous barafe,
 Hac o tonet da c'hoessa, en dornic he maëstres,
 Eun tammic bremp'he vara, p'he eun tamm patates.

Lezomp ar paour quez Moutic, demp da Bouchic ive :
 'Vit bean hir he c'herguio, divoar teign ar mene,
 A fell dei n'em revoltu a enep d'he Chrouer
 Pini dezi na brodu, zivoas ! nemert mizer.

Ia, ma vije eur c'briste-n, ma breudeur, a zonjfe
 Enn mizerrio ar bouchic hac enn he faourante,
 Na zerje mui he galon ouz morz ar loenic-paour
 Pehini a dal dimp-ni arc'hant hac ive aour.

Clavz ez eo ar maësserie a zefrut n'he all cad
 Eunn tammic boët d'he vouchic n'hac ive d'he danvad ;
 'Vel en guiz d'ar Vadelen, bemde a seuil daëro,
 O tonet da gontemplin enn he loënediguo.

Læzomp ar paour quez Bouchic breman 'ta a goste
 Ha demp d'ar paour quez Coantic, eur momedic ive,
 Goail drist ez eo he miguio, zivoas ! defaut a voet,
 N'eurblaneden ar goassan, Coantic paour, ez out coeet.

N'hen deuz dezi nep moyen pelloc'h da vean lard,
 Rac ar peurin evithi, en pep-couls, a zo stard ;
 Razet ez eo ar parco 'vel gant ar razouer,
 Pe 'vel pa ve tremenet dreize oll ar falc'her.

Deus ar parc, pa zortio, n'em gavo primm hep dour
 D'ar pins a renqo monet 'vit gallout n'em zicour,
 Hac ar paotr-zaout, mateze, scouts-caëro c'halompad,
 A denio primm d'he c'herguio zivoas' gant ar zec'bad.

Ouz he stag, pa vo arri, gant ar bres d'en em glasq,
 Muan n'allo a sachjo voar gormenic he masq
 Ouz n'en c'houl, quer treuzas, eun tammic boët
 [mar plij :
 Ar zonj deus ar loen paour-man en pep-couls em afflij.

Petra vo t-olet dezi eno neuze d'he fias ?
 Eun dornad plouz marteze hac a vo da he fas,
 Ha gant hennas a renqo ober he fansion,
 Evit foen n'he devo quet, quen nebeut a veichon.

Lezomp ar paour quez Coantic ha demp d'ar paour
 [quez marc'h,
 Pehini, zivoas ! ive goell losq d'he zav n'em dalc'h ;
 Cazi eo crog da goean divoar e beder c'har,
 Ha c'hoas beguen ar scourje out'trau zo goal digar.

Hep nep lam kerc'h ea goelan eno hanter ann amzer,
 Da greguin voar ar bara n'en deus c'hoas nep pouer ;
 Ar foen dean zo tallet, couls memez 'vel ar plouz !
 Labour he teus 'ta, Moji, d'ober beudez fas-rouz.

Labour he teus da voelan, te ive, marc hadour,
 Te pini a bæz, bemde, bars eo huellan cour,
 Ar boët pui a zebres ; mes ze n'eo quet avoalc'h :
 Queroc'h did cals a gousto pausionn da vare'h.

P'he 'zi gant da c'hoec'h guennec, p'he guentoc'h
 [gant da seiz,
 Da glasq boët d'ez Canari te gavo tud a leiz,
 Pere a voerzo, dide, barz en huellan pris
 Eun taim boët ha na vo quet brassoc'h vit pen da vis.

P'he 'zi c'hoaz da glasq lojan enn hostelerio,
 N'out quet capabl da gompren, peguement a gousto,
 Did eno ann ordinal, bez eta gant da jeu,
 Rac quer vo bevoan loënet ebars er bla a deu.

Cam da c'heno, mar queres, ha taston da c'hodel,
Mar queres en em lezi, gant glac'har, da vervel;
Da varc'h a renqui goerzan, couls vel da chareban,
Mar gout'ta eur miliner custom prim n'em zamman.

Labour he teus da voelan, te ive, paotr harnes,
Ha da gargan da galon a bep tristidiguez;
O tonet da gontamplin enn eur quezegueyo
Pere goejal a c'hreæs en guis pompinello.

Te bepret a blij dide guelet da guezec lard,
Pa zelles ouz boëd-bian n'elles mui bean zard;
Meur a damm zur a yuni evit rein d'ar vejer
Couls memes 'vel d'a Voji, ann dra ze a zo scler.

Meur a damm c'hoas a laëri, en ze neus quet a dout;
C'hoas da vonet d'ar prison na vi pelloc'h en rout,
Eun tammik croz marteze reio did da vest,
Doue deus da garante bepred n'em gavo test.

Zell peguen treut eo arri ar gazez velen-ze,
Pehini 'ta, neus quet pel, vel ann aour a luc'he;
Chanchet he deus a habit ha chanchet a groc'hen,
Cazi eo crog da c'hoerzin out-hi ar guiguerien.

Mar guez gant-hi d'ar foario enn esper he guerzan,
Paotred ann arc'hant-bian a glasgo he frenan,
Ha caër as po chipotal a vezi c'hoas riscler
Da return d'ar guer ganti hep na vezo guerset.

Quement-se oll a c'hoarve 'barz en amzer brezant,
Vel pe ve bianet en hon zoez ann arc'hant,
Mes salocroas, n'en d'eo quet, paturach eo a vanq
Zivoas dimp, boët al loënet zo pel deus bean franq.

Labour e teus da voelan c'hoas, te, plac'h tiegues,
Ha da gargan da galon a bep tristidiguez,
Ho tonet da gontamplin enn eus Coantic ive
Ouz pehini 'ta quemend eo stag da garante.

O coantic paour, emezout, red a vo perissan,
Da vest a lavar bemde he vo red da lac'han;
'Vit mont guenid d'ar foario, den na bren ac'hanout.
Da vont'ta gant ar c'higuer, Coantic paour, risquetout!
Mæs da c'hortos quement-se dal c'hoas eunn tammic

[foen,
Biscoas na meus bet mesquet dousoch, gentiloch loën
Evit ne c'houde Coantic, petra dal laret-se?
Red eo dimp n'em guimiadin ann eil dious eguile.

A te, ma loue bian, zorti primm deus ta goël
Na mo quet deus ac'hanout enn nep feson ar voel;
Na rez mui nemert crial en defaut da gad læz,
Capabl ez out da ziscar deus he zav da vamm-guez.

Labour he teus da voelan, te c'hoas, plac'h e c'hochie,
Ha col ha heterabes a vanquo did prestic;
Oblijet vi da lezel da borc'hel bian treut
Da dammic brenna doujes couls 'vel da dammic bleut.

Neus quet pell voa ar ranson cochic quez a voar-n'out,
Ouspen deus an daou-hanter en traou disquennet-out,
Poursu da chans pa gari, kers buan enn as tro,
Da vëstres a lar dide : quen-a-vo, quen-a-vo.

True ha compassion, mæ breudeur, eo goelet
Bars en pes position enn em gav ar loënet
Surtout bars enn hon amzer, en kær ha voar ar mæs,
Deja, gant ar sort rimo, ma spered n'em gav fæs.

Homan a zo eur resit composet a nevoe
Divoar benn ar goall-voaten a ro dimp-ni Doue,
'Vit donet d'hon hastian dre voyen hon loënet
Voar bere, ouspen mil goech, zivoas! hon deus pec'het.

Ped goech, oh! ma breudeur, n'hon deus quet impliet
Hon zaeodo da valozin, surtout voar hon loënet?
Nin epquen a zo quirriec mar maingt enn paourante,
Doue, 'vit hon c'hastian, a bermet quement-se,

Ped goech c'hoas, zivoas! ive n'hon deus quet profitet
Diouthe da labourad d'an deio difennet;
Evel ma z'eo d'ar zullio, d'ar goelio-bras ive?
Eun tammic eals re hardi a voamp oll ouz Doue.

Ped goech c'hoas a gouennan, gant ann ar a venjans,
N'hon deus quet dreize torret lezen ann abstinans,
O tonet da gontantin hon sensualite,
P'en d'eo quig a blij dimp nin breman hon defo re.

Red ez eo d'ar voucherrien donet bemde abenn,
'Vit hon brassan domaj, ouspen deus a vil loën;
Deus a bep ras a voelan o vont d'ar guigueres
Couls memes 'vel d'ar santier hanvet ar guigueres.

Evit mann c'hoas a voelan, surtout bars ar foario,
Loënet bras, loënet biar, bep sort qualiteo,
Eun eunn tol goel chanchamant n'on quet penos
[vo cont :

Meus aon da glasq bara, fermier, a vo red mont.

Tor he benn ta p'he gari breman d'ar feurm quer ze,
P'he birviquen na alli bevoan da vugale
N'em vevoan da unan ha padan da aotro,
Ze did zo impossibl, p'he eo faous ma c'homzo.

Ha te, paour quez devoejer, zell entrezec ann env
Ila lavar, a greis calon, gant eur zel a drue,
A vo bian da labour, te ive, artisan,
Lar quement-se heb ober mui a c'heno bian.

Ha te, perc'hen ann danve, groa ive da ganvo,
Ma n'as pe quet a arc'hant, caër as po cad plasse,
A vi ive evelomp eur paour quez malurus:
Homma n'eo quet ann amzer da vean evurus.

Enfin, aman, ma breudeur, 'vit gair a achuan
Ar recit-man quen touchant pehini a ganan;
Ous ho pedin ha galon, oll, d'en em gonsolin,
Netra mui na c'honcfomp ouz n'em dizesperin.

Ann auteur deus ar recit pe deus ar ganouen
Pehini dec'h a citan, gant daero hag anquen,
A zo en peb bro hanvet, couls 'vel en peb parous,
Gant an oll, bras ha bian, Yann, Yann, Yann Ar Minous.

Ar lec'h deus he domissil, a-boe ma z'eo bian,
A zo en eur vilajen hanvet Zant-Adrian,
Situët en eur barous hanvet Pleumeur-Gautier,
En Lezardren eo ganet, en Kervouster ive.

Bezan en deuz da vevoan nombr braz a vugale,
Me gred eun hanter-doussen a gonter diout'he,
Pere oll a zo yaouanc, dibourve ha dinerz,
Bepret en hent ar furnes ar c'hoec'hic-ze a guerz.

Grac d'he da gontinuin oll dre ar memez hent,
Certen ma na reont quet me a scrigno ma dent,
Ma baz c'hoaz a guemeria, couls vel ma scubalen,
Caër en defo Françoisic essa ma diarben.

VANN AR MINOUS.

(Propriété de l'Editeur.)